


## PERSON SERVEL

O C'HOULENN ANN ALUZEN ÉVID ILIZ NÉVÉ HÉ BARROUZ



Kenvreudeur, minioned, ha kément dén em c'hleô,  
'Vid eunn Iliz névé é vank kalz-kalz a dreo ;  
Ha râk sé, mé hô péd, hô torn don n'hô kôdel,  
Rôid eunn drâ-bennak da Berson paour Servel !

A viskoaz éz eo bet, da vikenn vô ar c'hiz .  
Gand pep den trôet-mâd, pa zaver eunn iliz,  
Larout : « Ha ma lôd-mé. » He zorn zô 'n'hé c'hôdel.  
Grid évelsé, mar plij, 'vit Person paour Servel !

Doué d'eunn darn en deûz kalz a vado rôet,  
Eunn darn all digant-han nébeùtôc'h hô deûz bét.  
Herve zé pép-hini, hé zorn enn hé c'hôdel,  
A roi kalz pé nébeùd da Berson paour Servel.

Dén né laro : Ma prof sô hep talvoudégez ;  
Pép dén a anavé prof paour ann intanvez,  
Deùd eûz hé c'halon frank mui 'vid eûz hé gôdel.  
Grit pep-hini 'velsé gant Person paour Servel !

Hé prof gant Jézuz oé gwelet ha kalz meûlet,  
Ha paéet ; rak gant-han trâ vâd 'bét n'eo kollet.  
Aman ivé hô prof n'ai két gand ann avel,  
Rak gwelet rai hô torn enn dorn Person Servel !

Eur gir anavéet : Dâl, unan zô welloc'h  
Evit n'en eo : Goudé, mé roiô kalz muioc'h.  
Rak sé 'ta, 'vit 'n'ai két hô kir gand ann avel,  
Raktâl pé brof pé sin da Berson paour Servel.